

ILIZ BEAR

219

War don : Deut, Gwenezaniz, da veuli :

pe Kroaz ann hent (Barzas Breiz) :
pe eun all

I.

Enn Bear a oa eun Iliz
Pehini oa lorc'h Beariz,
Eun Iliz kaër, frank hag uhel,
Euz ar c'hosan en Breiz-Izel.
Ha Doue ouz-omp kounnaret,
'Neuz roet liv ma ve devet,
Hag ann diaoul, enn eur iudal,
'Neuz c'houeet, gant joa, eun tan-gwall.

Ann tan a grogaz 'barz an tour,
Ha na oa ket, a pomp, na dour !
Penez lac'han eun tan ken braz ?
Na n'helle den tostaat, siouaz !

Ann Otro Person, glac'haret,
'Gerc'haz 'r Zakramant benniget,
Ann tenzor ann talvoudusan,
Hon Finvidigez ar vrasan !

Ann tan 'vel eul loën didrue,
A groge, hag a diskare,
'N eun tol e krogaz penn-da-beenn,
'N eun tol e koueaz ann douenn !

Fraillon a re ar c'halonou,
O wellet, euz kreiz ar flammou,
Fubuennou tan o nijal,
O klevet ar c'hoat o strakal...

Ar flamm a rede, a lampe,
Ann tan a strake, a strinke ;
Ann Iliz oa evel ar mor,
Ar mor a dan, er Pugator !

Daoust d'ann dud vad, n'hon deuz galled
Zavetad nemed gwall-neubed
Euz ann treo kaër a oa enn-hi,
Kalz a zo chomet da devi...

O Gwerc'hez Bear binniget,
Gwellet am euz ar jendarme !
O tougen ho skeudenn pounner,
Trugare d'he, ha d'hon Zalver !

Zant Bernad hag he relego,
Ha darn-vuian ar skeudennou,
Ha taolenn ann Hen a Groaz
A zo galled kas e-maez c'hoaz.

Hogen, ar gador prezek-kaër,
Ar balustro, hag ann Aoter,
Ar c'hoadañ ken brao kizellet,
Hag ar c'hieier, a zo devet.

Paour kaez Iliz pan ho kwellan
Ma c'halon a zeu da rannan,
Pa wellan ho mogeriou noaz,
Hag ho pilierou ken zont c'hoaz.

Hogen, hon beleien zantel
A ia, gand furnez, d'adzevel
Hon Iliz kaër ha binniget,
Ann Iliz gwech-all ken brudet,

Ann Iliz ben brudet gwech all,
Ken ma oa bet graet d'ann nor dal,
Treujo dir hag a oa uzet
Gant botou ar pelerined !

II.

Ann Iliz-ze oa bet zavet
Gant menec'h Benedictined,
Deut, seiz kant vla a zo breman,
D'ober eur Manati aman.

Kont a Lamball, Javre Bothrel,
'Gasaz pewar manac'h zantel,
Da Stéphan a Benthievr, he dad,
P'hini reaz d'he digemer mad.

Rei a reaz d'he, damdost da Vre,
Al lannek, lec'h na oa neuze
Nemed rec'hel, balan ha koat,
Hag eul lean koz enn Puskoat.

Goude eur vuez a bedenn,
A labour hag a binijenn,
Ar venech-man a c'houlennaz
Ma veziat sebeliet enn kroaz.

Ar zant braz, euz a urz « Cîteaux »,
Zant Bernard, Abad a « Glairvaux ».
A deuz, lerer, d'ho gwellet,
Gant han Bear oe binniget.

Binnigao reaz ar mean kentan
Euz ann Iliz devet breman...
O Beariz ! pebez glac'har !
Daoust ha milliget 've Bear ?

III.

Daoust hag hen e vemp milliget,
Pan eo bet hon Iliz devet... ?
Na oa ket karek ann Iliz,
Na oa 'vit-hi nemed dispriz !

Kalz a re trouz hag a gomze
'Vel er marc'had, hag a c'hoarze,
Kalz ie 'maez, 'n eur sklapad ann nor
Pa bigne 'r belek er gador !

Ziouaz d'imp ! dre hon dizurjou,
Hon euz chachet war-n-omp poaniou,
Gwalen Doue a zo war-n-omp !
Grempt 'ta pinijenn, ha pedomp !

10 Analyses
L'histoire

He dreist-holl, pedomp stard ma vo
Auzavet hon Iliz eno,
'Lec'h 'neuz zant Bernard prezeget,
'Lec'h an euz zant Ervoan pedet.
'Lec'h neuz pedet ar venec'h koz,
'Lec'h m'int sebeliet, 'u eur c'hoitoz
Ar varn divezan, a c'halvo
Euz ar be ann holl relego.

Mogeriou koz Iliz Bear
A zo sanket don enn douar
'Barz eun douar san'el, mar zo,
Nag a zent sebeliet eno !

IV

Eno ac'h eo bet interet,
Hon zri diwean personed,
Hag e c'hel'femo, hep keun na m'ez,
Dilezel Iliz ar Werc'hez !

Otro Gwillermik, Tadjik Koz !
C'houi 'zo breman er Baradoz,
C'houi a zo leun a garante,
'Vit ann Iliz lec'h 'man ho pe !

Ha c'houi ive. Otro Herri,
Ho pet koun ho peuz evit hi
Gwerzet ho tanve, ho mado.
'Vit hen dresan, ugent vla zo.

O'tro Gwillou, gwir galon aour,
Belek zantel, ken mad d'ar paour,
Me 'wel c'hoaz ho penn kurunet
A vlev gwen flour ha rodellet.

Ho pet truez c'hoaz ouz Bear
A zo breman leun a c'hlac'har,
Roet d'imp graz digant Doue,
D'adzevel hon Iliz aze.

V

Aze e fell d'imp 've zavet,
'Lec'h ma oa kent, e vo bepred,
War beiou hon veleien koz,
A roio d'imp c'hoaz ho bennoz.

Gant ar mein a zo bet piket
Gant ar venec'h, ha kizellet
D'ober ar pilierou ledan,
Kalz krenvoc'h 'vit ma rer breman.

Me 'oar ervad, na welfomp ken
Ar c'heur kaer 'vel 'oa diagan,
Gant he stalliou enn koat terv du,
Pemp war-n-ugent euz a bep tu.

Na welfomp ken mui ann daolenn
'Lec'h ma oa, war eur goumoulen,
Ar Werc'hez div'am kurun t
Er Baradoz, gant ann Dreinded.

Hag ann Eligou ru ha koant,
'N eur vouse hoarzin, o nijal drant,
Enn dro d'ar zent aketuz braz
Da veuli Mari leun a c'hraz !

Pebez levenez a gavent
O sellet eurusted ar zent :
Zant Stephan, ar c'hentan merzer,
Zant Ervoan gant he ialc'h pounner.

Zant Joseb gant 'r flourdelizen,
'R roue David, gant he-zelen,
Zantez S-sil, o kanan flour,
Gant ogro, 'vel re Wir-Zikour.

Hag, izeloc'h, war ann douar,
E oa prosesion Bear
Gant banniel he zant Patron,
Hag er c'hreiz, stouet ar Person.

'N Otro Herri, 'N otro Prijent,
'N otro Gwennaf, evel tri zant,
Oa stouet, hag, hanvalet mad,
Zavet d'ann Nenv ho daoulagad.

Na welfomp mui ar balustro
Gant garlantez koat tro war dro,
Na kador-prezek kizellet,
Gant he bleuniou koat alaouret

Kador 'lec'h ma pignaz gwec'h-all,
Beleien vad 'zo et lec'h-all
Da hadan karante Doue,
'Vel ma rent aman d'ar c'houlz-ze.

Mar bije bet 're-ze aman,
Ho defe poaniet stard breman
Gant uerz-kalon ha gwiegez
D'adzevel Iliz ar Werc'hez.

Rented d'imp, meneiou Kerne,
Ar beleg mad 'zo et du-ze
War dro tri bla 'zo, da berzon,
Hennez a zo leun a galon.

VI

Hogen, hon deuz eur Pastor mad,
Mad evid-omp evel eun tad,
Hag evit rei d'ezhan skoazel,
'Neuz eur c'hure fur ha santel.

Me ho ped eta, Beariz
Da derc'hel gwel-stard d'hoc'h Iliz,
Iliz zant Bernard hon Patron,
Hag ar Werc'hez vad hon I ron.

Ann Iliz' lec'h m'omp badeet,
'Lec'h m'eo hon c'herent eurejet.
'Lec'h hon deuz graet hon fask ken'tan,
'Lec'h ma oemp deut da gonfirman.

Roomp dorn dre hon fedentou,
Hon labour, hon aluzenou,
Da zavel c'hoaz da c'hloar Doue
Eun Iliz uhel 'gad aon Ne.

Eun Iliz uhel, a gaso,
Betek ann Nenv, hon fedenno,
A lavaro, a oad-da-oad,
Fe Beariz enn ho Mamm vad.

Doue roio d'imp he vennoz
Hag, eun de, 'barz ar Baradoz,
En kichen ar Werc'hez skeduz,
'Vefomp da viken evuruz

Evel-ze bezet graet !

GWENNOLAÏK.